

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

III. CHARIVARI

(follenn 76)

— — —
Groed da Iann ar c'har kemener intaon
deus a Taole

— — —
Neb a velje Iann ar c'har e vonnet gant ar ru
e dog deus gostez e ben, e vralla en daou tu,
e vouchouer en he zorn en avis c'hoeza e fri
A balamour dan dra-ze kanomp charivari.

— — —
Neb a velje Iann ar c'har e vond gant ar ru ver
Deus a ti fanch ar floc'h da houd a Jann voa er ger
evid gouzoud digato a Jann a ve en ti
A balamour dan dra kannomb chalivari.

— — —
Ig ar rideller a lavare assezet oc'h an doll
Me a zo kontant, potret, e vezo mad an toll
Me roio va fillioez da vond ganeoc'h d'ho ti
Abalamour dan dra ze kanomp charivari.

— — —
Koantik e Mari-Jann riou, e asmira a ran
Mez kerse a vezo ganti pa deui ar wic'hac'han,
Pa deui an aripaill da valle dre he zi
A balamour dan dra ze kanomp charivari.

— — —
Mari Bozeg, 18 févr. 1851

~~~~~  
vvvvvvvvvvvv